

# DISTRO A VREZEL

Métro.  $\text{♩} = 88$  environ.

Kanet er bloavez 1910, e Plougastel-Daoulas,  
gant J. PENN, euz Kerlouan. H. G.



Bon - jour ha jo - a en ti - man, O



per ha prun, eur guén-neg al lur, Ar



beñ - he - rez pe - lech' e man, O



per ha prun, eur guén-neg al lur, Eur



guen-neg a - tao, eur guén-neg eb - ken.

## II

Eat eo d'ar poull gand he dilhad  
O per ha prun...  
Mes o fanka a rañ timat,  
O per ha prun...

## III

Ma oufen-me an hent d'al lenn  
Me approufe ar fumalen.

## IV

Kit aze e teit al limod  
Trouz he golvezig a glefot.

## V

Bonjour, plac'hig divar an dour;  
C'hui a voalc'h tenn, c'hui a voalc'h flour.

## VI

C'hui a voalc'h flour, c'hui a voask tenn,  
C'hui voalc'hfe d'in-me va blonden?...

## VII

Me ne ran fôrs deuz ho blonden,  
Ken nebeud euz an dour el lenn.

## VIII

Sellit, plac'hig, ouz va inkane venn,  
'Zo eur vrid arç'hant en he fenn.

## IX

Me ne ran fôrs euz oc'h inkane venn,  
Ken nebeud euz an dour el lenn.

## X

Sellit, plac'hig, ouz va boutou,  
A zo bordet gand rubanou.

## XI

Me ne ran fôrs euz ho poutou  
Ken nebeud hag eur bern louzou.

## XII

Me 'm beuz eur breurig a bell bro,  
N'em beuz ket gaelet seiz vloaz-so.

## XIII

Ma klefe hen-nez ho komzou,  
A vruzunfe oc'h eškernou.

## XIV

Mar d'e deuz ho preur e komzit,  
Outhan ive e parlantit.